

97

(98)

Tennet euz ar gazetenn « Ar Groaz »

HUANADOU

Eur potr iaouank 'meuz anveet,
 Laouen ha drant, glân he ene ;
 Gant an holl e oa-hen karet,
 Rag d'an holl servich a rente.
 Dec'h 'oa dibec'h, herie n'eo ken :
 Chechet gant mignoned diroll,
 'Man breman 'touez ar vevierien
 Korf hag ene eo et da goll.

Ar gwâz a welet-hu duze,
 Gwech-all ive a oa prizet ;
 Gwech-all 'oa eun den a-zoare
 Rag d'an tavarniou n'ea ket.
 Sellet breman ouz he zrem glaz
 Sec'het ével eur c'héf maro !
 Sellet ouz he vugale noaz,
 O c'houl'en bara, en pillo !

Gwech-all 'oa bepred o c'hoarzin.
 E tal he wreg en em blije,
 'N he diegez e oa lirin,
 Beure ha noz e labouré.
 Evach hepken a gar breman,
 Ha, bemde en hostaleri,
 'Lako he wennek diwean
 E-barz eur bannac'h « eau-di vi ».

Gwelet am meuz eur wreg karet.
 Plijadur, levezet he zi,
 En nebeut a zeiou kollet,
 En eur heuil an hostaleri.
 Mam dinatur ha plac'h diboell.
 E tilez he mibien bihan,
 'Vit redek, hudur, diskabel,
 Da glask eur bannac'h gwin-ardan

Den iaouank, ha gwâz, ha pried,
 En eur heuil an hostaleri,
 A zo bet buhan diskaret
 Ha lac'het gant ar vewenti.
 Koueet e-barz nerz ho buhe,
 'Ma ho c'horf duze, er vered...
 Mez pa zonzjer en ho ene,
 Leac'h a zo da vean spontet !!

F. JAFFRENOU

17 ans